




# CHANSON AR GIST



*Evit beza goas, e renker caout nerz a teod*

Al lano eus ar saour, an nerz eus an eol tom  
Deus skalfet da blusquen' vel kriben menez Hom ;  
A gant avalou yel da skoultrou' so pleguet,  
Guezen, Guezen brokus, me zo deu't das guelet.



An izili nerzus, morzet gant ar scuider,  
A veac'h ma ve'int disam nem astenn dibreder.  
Ar peur-eost e zo bet, breman ar vialen  
Var ar frouez dare' choariou us d'am fen.

Sklapet gant ar c'houmoul, ar barajou grisil  
Ne gouezont ket puilloc'h var doën ar chanil  
Eguet an avalou a ruill var an ero.  
En boutegou, merc'het, dastumit anezo !



El loch, var ar c'holo, en tri bern boulet mad,  
An dous, ar c'hoerv, an trenq a dalvedo tîmad.  
Tafeïd anezo : an aval a laka  
E liou cûn, e venet, var drem ar re gossa.



Yeot dishenvel en blas, adet gant gouizieguez  
Eus eur foënnec t'ilet' ra an dalvoudeguez  
Mesquet en eur c'helorn gant eun dorn anaoudec  
An tri rum avalou a ra gist hep habec.



An draillerez divergl' zo nevez kempennet,  
E skilfou a zo lemm, he aeliou lardet.  
Tro dar rod, dil-dillo ! ac ebars er penton  
Couezo ar ragnadur ep disterra cofon.

Ar voask-gist a zo trez. he gwimellet skeudus  
Compez eo an daol till : an nerz a vo fonnus  
Ar plous a zo eünet ; druz eo ar ragnadur  
Ac ho goad a roïo kals a fret dar sclotur.



Abers ma tiredo eus ar c'henta mouden  
Ar gist beo a nerzus, dizolomp ar pen :  
Ar C'hrouer a lavar beza trugareket  
Evit e vadelez varnomp difun bepret.



Peder doën soul flam goude eur barat dour  
Eus ar vouden stardet so eur guir melezour :  
Pep hini so lirzin, pep hini a zardon  
Youlou a ev'rusted eus a greiz e galon.



Gant he zaouzorn cropet pa deui'o ar goanv  
Da bunta divergont clouarijen an anv,  
Dirac he gist flipet, an tad coz er goudor  
A lavaro dezan « choumit adrec an dor »

Averc'h drant a yaouanq, gant he sellou laouen,  
A vel en eur dridal he amouroujen  
O carza direvus daou ha tri chopinad  
En eur vlika dezi calz a daoliou lagad.



Dibontit an douken, laro ar map hena  
Ar varadec vo stard, men' rank beza quenta :  
En henni he cavin eoll d'am oll elinou...  
A distro-comz beguec evit an tezennou...



A dakadennou stank ar bib, ve bareguet,  
Ac a sonjou melus eur galon 've leuniet :  
Quen niverus e zint ebars om c'halonou  
Evel an niver bras eus an dakadennou.



M'pad ho guinivelez, zilet dre eur gorzen,  
Ar gist lipous a ruill evel goad eun eujen ;  
Ac ar barikennou gant ho guinou digor  
En diguemern'hoantec betec teulal gloc'hor.

Abers neubeut deiziou an oll dufennou derv  
A bizen a bep leac'h dre nerz difram ar berv.  
Ar go a lodenna ar pezh 'so mad eus fall :  
Countel criz ar c'higuer a ra crenn quement all.



An nerz a dreuz an derv 'so mam d'an oll nerzou ;  
Honnes a guever clenk 'bars goad an avalou ;  
A diveac'h, a disam, ar gist 'gas anezi  
Er pen ar goanika eus om holl izili.



Pa stag an efer-gist var eun loden varad  
Ne harz eus e benfec na monden na skolpad :  
Gant kerz ar gorvente n 'neur beuri an douar  
An doanen a zistag touzet gant drem ne var.



Daoustdoc'holl ijinou, var leuren an dachen  
Paotred meür en eur stourm, ha gouizieg er gouren  
Ma na efit quet gist, en eur padus stourmad  
Ledet dibalamour, he colfed an danvad.

Maguit, maguit ho nerz gant goad an avalou,  
 A scanv, a farouel 'bars an aubadennoù  
 C'hui a blijo timad dan oll merc'hed yaouank  
 A ganeoch he vefont ato seder a blank.



Staguet ous ho mam-bro dre gant mill carantez  
 Oc'h himor a vo beus, ho goad a vo compez ;  
 Ac ebars er c'hann put, var dachen ar bresel,  
 C'houi a vezo dinam gant ar fusul Lebel.



Breizis aefe gist, ha var ar meziou glas  
 Galloud Rom ha Cesar ganthe a orgellas.  
 Cesar a rank ansao he crene an derjen  
 Dirac ho nerz calon pa youent « tor he ben »



Cren evel ar mor bras, coant 'vel ar yaouanquis ;  
 Eün 'vel eur ganaben, divac'hagn en peb guis,  
 Yac'h evel eur peskie dinask ebars er ster :  
 Cetu aluzennoù ar gist mad de efer.

— 7 —

Diseme a bep tra, ar c'hoar gant he vevan  
A sklabe a bep tu ar c'haëra sclerijen;  
Divoanet var eur c'horf ledan ha dic'houli  
Ar speret a zig or splan a lem 'neur veri.



Bars an neandegou, dre ar caqueterez,  
Igolen an teodou evit an dianvez,  
Paotret eferien gist, ho contchou burzudus  
A vago plijadur ar merc'het aquetus.



Pa deui eun teod benag da egas oc'h hini  
Paleoc'het, cribinet, prest e ranko moti ;  
Prezeguenner ebet ne raïo harp do pen ;  
He gomzou a vo lez : ho re a vo dien.



Eneb eur galon dir merglet gant goad tousec,  
Ho cojou flour a fur' vo ato gonidec !  
Ar gist beo a arlineq talantchou ar speret  
Ac heb scuisder o dalc'h divorfil mad bepret.

Marteze va fluen a zo bet re dister ;  
Evit meuli ar gist e zoun choumet re ver ;  
Rac aon e kemennan dar barz Anachreon  
Bleïna eur Breïzad da hirraat va zon



En calonou a zan breman da ada yeod  
Va zon a deus desquet petra' ro nerz ha teod.

YVON

